

## Lid chekennoù raktresoù 2024

### Remise des chèques aux projets 2024

#### 1 / Bilañs Redadeg 2024 / Bilan de la Redadeg 2024

Ur sapre darvoud zo bet aozet war an hent a-drugarez d'an holl youlidi. 2222 km redet ha 2087 km prenet, muioc'h eget biskoazh! Miliadoù a dud o redek war hentoù Breizh. 542 km prenet gant ar c'hevredigezhioù, 150 km gant an embregerezhioù, 1061 km gant an dud ha 306 km gant ar strolladoù tiriadel. Loc'het eo eus Beg ar Raz ha degouezhet eo war an ton bras e Montroulez. / *Nous avons vécu une incroyable édition en 2024 grâce aux bénévoles de la Redadeg. Au total 2222 km courus, et 2087 km achetés, un record ! Des milliers de coureurs sur les routes de Bretagne ont suivi le convoi. Plus de 540 km achetés par les associations, 150 km par les entreprises, 1061 km par les acheteurs individuels et 306 km par les collectivités territoriales. Le départ s'est tenu à la Pointe du Raz et l'arrivée a été accueillie en grande pompe sous le viaduc de Morlaix. Une vraie réussite.*

#### Sammad evit ar raktresoù skoazellet e 2024 / La somme collectée pour le soutien aux projets 2024

Neuze e 2024 hon eus redet gant ar pal harpañ 8 raktres hag ar rouedad Diwan: Ar chekennoù zo bet roet da vare ar festival Deus 'ta e Brest/ *Nous avons donc couru en 2024 avec l'objectif de récolter des fonds pour 8 projets et pour le réseau Diwan. Les chèques ont été remis lors du Festival Deus 'ta à Brest.*

- Splann ! -enklask e brezhoneg / enquêtes en breton – 15 000 €
- Kleor – levrioù da glevet / audiobook en breton - 3 000 €
- Skol An Emsav – raktres Frikorneg ! / abonnement à des magazines en ligne- 13 000 €
- Timilenn – al lennegezh evit ar re yaouank / édition pour les enfants - 5 000 €
- BBDLL – echedoù e brezhoneg / développement des échecs en breton - 5 000 €
- Dibistig – ma levr kentañ / livre bilingue offert à la maternité de l'hôpital – 4 000 €
- Teatr Piba – pezh c'hoari Va Zud Kozh/ pièce de théâtre Va Zud Kozh - 12 000 €
- Plum FM – gallaoueg war wagennoù bro Redon / du gallo sur les ondes en pays de Redon – 3 000 €
- ha Rouedad Diwan/ et réseau Diwan - 75 000 €

#### 2/ Galv Loc'hañ ha Degouezh 2026 / Candidatures Départ et Arrivée 2026

##### Redadeg 2026 a vo eus ar Gwener 8 d'ar Sadorn 16 a viz Mae 2026 !

*La Redadeg 2026 aura lieu du vendredi 08 au samedi 16 mai 2026 !*

Galv d'en em lakaat war ar renk evit aozañ al loc'hañ pe an degouezh ! Digor eo ar galv d'an holl gevredigezhioù. Evit gellout aozañ mat Redadeg 2026, e fell deomp sevel an hentad abretoc'h. Anat deoc'h hon eus ezhomm gouzout e pelec'h e krogo an hentad ha davit peseurt kêr ez aio ! Gortoz a reomp respontoù a-benn ar 25 a viz Du 2024 d'an diwezhatañ !

<https://www.ar-redadeg.bzh/br/keleier/galv-loc-han-ha-degouezh-2026>

*L'appel à candidatures est ouvert pour l'organisation du départ et de l'arrivée ! .L'appel est ouvert à toutes les associations. Pour aider les organisateurs de ces fêtes, un groupe de travail et de soutien sera constitué avec les bénévoles et les salariés de la Redadeg. Nous souhaitons travailler sur l'élaboration du parcours dès que possible, il nous est donc nécessaire de connaître rapidement les villes de départ et d'arrivée. Nous demandons aux structures intéressées de retourner leur candidature pour le 25 novembre 2024 au plus tard.*

**Darempred / Contact :**

Tifenn Siret – 07-57-55-81-72 - [tifenn@ar-redadeg.bzh](mailto:tifenn@ar-redadeg.bzh)

